

# AR VUHEZ KRISTEN



AVENUE DE LA MARNE

28

LORIENT



C/C. POSTAL N° 209-81

SUR

NANTES

## Koumanantchou

Koumananti a c'heller e pep amzer eus ar bloaz. — Skriva an hanoioù hag an adress fraez ha penn-da-benn ; ma n'eus bureo post ebet er gomun, lakat gant pehini e vez graet.

Koumanant ordinal : **61** .<sup>a</sup> bloaz.

Koumanant a enor : **10** .<sup>a</sup> ar bloaz, gant perz e 365 OFERENN (unan demdez) a vez lavaret bep bloaz evit hor madoberourien.

N.-B. — Hol lennerien, m'o deus c'hoant, a c'hell dreizo o-unan rei frouez an oferennoù-se d'o zud varo.

## Adkoumanantchou

An neb a vez echu e goumanant, a vez kaset d'ezan dre ar post eur « MANDAT-CARTE » evit ma c'hello koumananti a-vezez. —

Ni a gont war bolontez vat hol lennerien evit p'aea rak-tal.

An neb n'en devo ket paet **TRI MIZ GOUDE**, ne resevo mui ar gelaouenn.

**TAOLIT EVEZ** : lavarit atao petra 'zigasit d'eomp : **EUN ADKOUMANANT** pe **EUR C'HOUMANANT NEVEZ** ; ma tigasit asamblez adkoumanantchou ha koumanantchou nevez, **DISPARTIA MAT ANEZO**. — Evit eun adkoumanant, rei d'eomp an adress eün **EVEL MA OA WAR AN NIVERENN DIWEZA...** ha ma'z eo ret, goulenn da-c'houde chanj anezi.

## Chanj adress

Evit chanj adress, digas d'eomp 4 real e timbrjou gant an adress evel ma oa war an niverenn diweza.

## Liziri ha skridou

An holl liziri ha skridou (koumanantchou, adkoumanantchou, penadou-skrid evit ar gelaouenn, pedennoù goulennet evit ar re varo pe intansionoù all, keleier a bep seurt) a dle beza kaset da :

M. le Directeur de « Ar Vuhez Kristen »,  
28, avenue de la Marne, Lorient, Morbihan.  
C.-C. 209-81, Nantes.

N. B. — Ar gelaouenn-man a zo moulet ivez e galleg ; rak-se ar re o defe c'hoant da gaout an hini c'hallek e-lec'h an hini vrezonek, n'o defe nemet skriva d'eomp, hag e vefe kaset d'ezo *La Vie Chrétienne e-lec'h Ar Vuhez Kristen*.

## "Ar c'hurust bihan

Deiz e Bask kenta oa. Eürus bras oa ar c'hurust bihan.

Goude ar gousperou oa bet o welet e vamm goz, dalc'het en he gwelet gant an oad hag ar c'hlenved, ha n'he doa ket gellet dont d'an iliz... Hag edo breman o tistrei d'e di, eun ti bihan demdost d'an iliz.

O tostaat, e chomas a sav, rak klevet en devoa trouz, t'oliou dourn o lopa war an daol, gerioù divalo. Petra d'ober? En eun dervez evel hennez, penaos mont dirak e dad mezo dall a lavarfe d'ezan pep seurt traou diskiant ? Bez' e vije mont d'an ifern goude beza bet er baradoz... Mont a reas da borc'hed an iliz, hag eno e skuilhas daerou puilh.

An tad kaez, micherour gouziek, en dije gellet beva eürus gant e wreg hag e vugel, met an holl arc'hant a c'houneze, a veze dispignet en ostaleri, ha p'en deveze evet, e kolle e benn, n'oa mui henvel ouz eun den, met kentoc'h ouz eul loen penfollet. Ar wreg, eur vaouez eur ar re wella, a c'houzanve hep en em glemm. Poania a rae gant he bugel, hag e save anezan e doujans Doue hag e teske d'ezan kaout heug ouz tech mezus ar vezventi.

En abardaez-se eta, an tad, mezo gwasoc'h eget biskoaz ha bet heskinet e-pad an deiz gant kamaraded fall, a oa leun a gounnar.

An noz a oa deuet, hag ar c'hurust, atao er porched, ne grede ket mont d'e di. Met e-pelec'h tremen an noz ? Dont a ra sonj d'ezan en deus en e c'hodell eun alc'houez hag a zigor dor vihan ar sakreteri, ha goude beza bet en entremar, ez a da zigeri an nor-se, siouluk ; goude-se e sarr anezi, ha setu-hen er sakreteri ha da-c'houde en iliz. Al lampr a rae eun tamm sklerijenn, ha goude beza graet eur bedenn da Jezuz o chom e sakramant an aoter, ar c'hurust en em astennas war derezou an aoter, ha ne zaleas ket da gousket.

E-kreiz an noz e voe dihunet gant trouz eun den o vale dre an iliz hag o tostaat ouz an aoter... Gwelet a ra unan bennak oc'h astenn e vrec'h hag o klask digeri dor an ta-



bernakl. Eul laer, sklaer eo! Ar c'hurust n'en deus ket anavezet an den, met mont a ra hep aon da gregi e brec'h an den en eur lavaret :

« *Difenn da zigeri an tabernakl! It ac'halen!* »

Met al laer, gant aon da veza diskuilhet, a skoas eun taol kizell houarn war benn ar bugel hag hen astennas maro mik...

Antronoz, an Aotrou Person, pa zigoras an iliz, a gavas e gurust bihan war derezou an aoter, e benn leun wad. Divinout a reas petra a oa c'hoarvezet, o welet dor an tabernakl digoret ha torret. Al laer a oa bet en iliz hag en devoa lazet ar c'hurust aet eno da dremen an noz, o veza m'oa re a freuz en e di.

Pa 'z eas ar c'helou dre gêr, an holl a voe strafilhet. Mamm ar c'hurust a rae poan he gwelet, ken bras oa he glac'har. An tad a chome mantret; e zaoulagad tro an douar, ne selle ouz den...

An tad a gerze ivez war-lerc'h an arched, tental atao e benn, ha pa voe diskennet korf e vab en douar, e lezas eur yourc'hadenn spontus hag e kouezas a stok-korf d'an douar.

An ampouailh-se a gare e vab... Roet en devoa d'ezan taol ar maro. Met an hini en devije gallet lenn en e galon, en devije gwelet pegement a geuz en devoa...

Ar archerien a reas enklask. Al laer ne voe ket anavezet. An holl a gredas e oa eur reder-bro, deuet eus a-bell, en devoa graet an taol, hag en devoa tec'het hep beza bet gwelet gant den ebet...

N'oa nemet unan er vourgadenn o c'houzout penaos e oa tremenet an traou. Henez oa tad ar c'hurust...

Adaiek neuze e teuas da veza eun den dishenvel krenn diouz ar pez m'oa a-raok. Ne veze mui gwelet mezo, mat e oa da labourat, ha da zul, hen gwechall enebour bras ar relijion, e veze gwelet en oferenn, stouet e benn gantan o pedi...

Mont a rae alies d'ar vered da bedi war bez e vab, hag an daerou a c'hlebie e zaoulagad :

« *Va bugel ker, emezan, pardon a c'houlennan digant Doue ha pardon a c'houlennan diganez. Daoust ha n'eo ket re vras va zorfed?* »

Hag en eur zistrei, e kave d'ezan klevet eur vouez o lavaret d'ezan :

« *Bez fizians, Doue n'eus muzul ebet d'e drugarez. Pardon a ra d'ar vrasa pec'herien, pa ziskouezont keuz.* »

## Ar Werc'hez Vari e ti Sant Yann



An Aviel a lavar d'eomp e kemas Yann ar Werc'hez Vari en e di. An ti-se moarvat a oa e Jeruzalem demost d'ar Goanlec'h. Na Yann na Mari ne oant pinvidik hag an ti-se ne oa nemet eun tiig paour.

Eno e kendalc'h ar Werc'hez da ren ar vuhez a renas gwechall en Templ, en Ejipt ha dreist-holl e Nazared, en eur bedi hag en eur labourat. Evel gwechall de sant Jozef ha d'he Mab, hirio e pourchas da

Yann e voued, e walc'h hag e kempenn d'ezan e zilhad. Met an Abostol yaouank ne chom ket atao en he c'hichen, ret eo d'ezan mont da brezeg an Aviel, da vadezi ar baianed, da gelenn ar gristenien nevez. E-pad an amzer-se Mari a chom hec'h unan er gêr, hag eno sioulik en he c'hamb e sonj gant karantez er burzudou c'hoarvezet enni koulz hag en he Mab. Hag e sonj e bloaveziou kalet an harlu, e bloaveziou c'houek Nazared, en amzer leun a drouz ma prezege Jezuz, en e Basion.

Piou a lavaro ar pez a dremen dre spered ar Werc'hez? piou a lavaro pegen entanet eo he fedennou? Pedi eo buhez ar Werc'hez, pedi evit an Ebestel, evit an Iliz, evit ar Juzevien hag ar baianed, pedi evit ar bed a-bez, rak deuet eo da veza mamm an holl grouadurien.

Mari n'eman mui he Mab ganti; bez' he deus evelato an curvad d'e reseo alies e sakramant an Aoter. D'ar goueliou ez a moarvat d'ar Goanlec'h pe d'eur sal vras bennak e-lec'h m'en em vod ar gristenien evit an oferenn.

En derveziou all e chom er gêr, hag en ti bihan ma vevont, Yann a lavar e oferenn hag a gommuni ar Werc'hez. Na kaera taol-lagad!

Yann a zo en e sav dirak an aoter, eun daolig baour eul lienenn wenn warni. Ar bara hag ar gwin a zeu dizale da

en deus lavaret sklear d'eomp pere eo ar gwirioneziou a ranker kredi evit beza salvet; hag ar gwirioneziou-se, o anaout a reer hep poan.

Met bez'ez eus gwirioneziou all, en deus Doue, evel pa lavarfen, kuzet ouzomp; pe da vihana o lakaet en deus ken uhel, ken uhel, ma c'hell a-veac'h hor spered tizout eur sklerijenn bennak anezo.

Jezuz-Krist, hag hen a zo, e gwirionez, o chom gant e gorf e Sakramant an Aoter?

Ya. Ha ne c'heller ket beza salvet hep kredi kement-se.

Met, penaoz eman o chom er Sakramant? N'eo ket ret her c'hompren evit ober eur gommunion vat.

Gouzout a reomp, difazi, ez eus eun Doue, hag eo Jezuz-Krist Doue ha den war eun dro; hon eus eun ene ha ne varv ket; met penaoz kement-se holl? Sekret an aotrou Doue eo. Mont a c'heller d'ar Baradoz hep kompren an holl draou-se.

Koulskoude, daoust ha difennet eo klask anaout ar gwirioneziou kaer-se?

Nann, a dra-sur. Eun dra vat eo zoken; rak seul-vui a boan a laka an den evit o c'hompren, kalz pe nebeut, seul-vasoc'h eo ar sklerijenn a deu en e spered ha seul-dom-moc'h al levezenez en e galon.

Setu ar pezh o deus graet an dud desketa ha brudeta er c'hantvejou tremenet.

O sonjal eman e sakramant an aoter Korf Jezuz-Krist, ha n'her gweler ket koulskoude, o sonjal n'ez eus mui en Osti Sakr tamm bara ebet, daoust ma n'eo ket anet e vefe chenchamant ebet, an dud-se o deus dizoloet ar wirionez-man :

E pep tra krouet ez eus daou seurt traou : ar pezh a welomp hag ar pezh na welomp ket. Ar pezh na welomp ket, a zo e diabarz an traou, da lavaret eo : eun dra bennak, bras pe vihan, hir pe verr, ront pe garre, bouk pe galet, gant eul liou pe eun all...

Ar pezh na welomp ket a zo e diabarz an traou, da lavaret eo : nerz, substans, buhez, a laka an traou da veza ar pezh ma 'z int.

\*

\*\*

Sellomp breman ouz Sakramant an Aoter e-lec'h m'eman Jezuz-Krist o chom gant e natur a Zoue hag e natur a zen beo.

Petra welomp-ni?

Eun Osti wenn. Ouz he gwelet, e vefe lavaret e vefe bara. Met n'eus mui a vara; rak an diabarz, da lavaret eo : nerz, substans, buhez ar bara, traou ha ne weler e netra krouet, a zo aet kuit. Ne chom mui nemet an dianvez, spesou, neuz, seblant ar bara; hag ar spesou-se a zo evel eur golo.

Ha piou a zo deuet da chom dindan ar golo-se? Jezuz-Krist a-bez, Doue Eternel, ha den beo war eun dro. Ma n'her gweler ket, arabat beza souezet.

Da genta, ne c'heller ket, war an douar, gwelet an Aotrou Doue, Spered Eternel; ne c'heller ket kennebeut gwelet eun ene, rak eur spered eo.

Hag ar c'horf? N'her gweler ket kennebeut, rak Korf Jezuz a zo er Zakramant, hep diaveaz, hep seblant. Jezuz-Krist a zo aze hepken gant nerz, substans, buhez e gorf, traou ha ne c'heller gwelet e netra krouet.

En eur ger, Korf Jezuz-Krist, er Sakramant, a zo kuzet dindan spesou, neuz, seblant ar bara, e-lec'h substans, buhez ar bara a zo aet kuit.

Rak-se ne welomp ket Jezuz er Sakramant, muioc'h eget ne c'heller gwelet eur pezh aour dindan eur golo dister.

\*

\*\*

Diwallomp eta da gredi eman Jezuz-Krist e Sakramant an Aoter gant eur c'horf henvel mik ouz an hini en doa war an douar, gant e holl izili evel neuze, gant ar gwad a rede neuze en e wazied. Nann! Kement-se a vefe eur fazi.

An Iliz, pa gomz eus sakramant an aoter, he deus eur ger evit lavaret sklear an holl draou-se, ar ger : *substantialiter*.

Diaes eo lakaat kement-se e brezoneg : setu aman koulskoude petra ziniñ an ger-se :

Jezuz-Krist a zo E *Substans* e sakramant an aoter, da lavaret eo : *nerz, substans, buhez* e gorf hepken, an diabarz, mar kirit — *hep an dianvez*, hep neuze, seblant e gorf.

MELEGAN.



## DIRAK AR MOR

*Na kaer eo selaou mouez ar mor  
O kana aze, tost d'am dor,  
A-wechou rust, a-wechou flour,  
Diouz nij an avel rez an dour.*

*Na kaer eo gwelet pas ar mor,  
A-wechou skanv, a-wechou lor,  
Diouz ma vez an avel a c'houez,  
Eun oanig sioul pe eul loan gouez.*

*Na kaer eo en em goll er mor,  
Pa zev an traez gant nerz ar gor,  
Ha sanko, eus an troad d'ar chod,  
En tarziou gwenn a skub an od.*


*Eun deiz, neket er mor-se eo  
E neuimp holl, met e Mor beo  
Ar Furnez hag ar Vadelez,  
War ochou ar beurbadelez.*

8-6-34

J. L'HELGOUAC'H, O. M. I.

DEVERIOU AR C'HRISTEN

## Servija Doue



*A-hen-dall, nag a  
vad a c'hallen-me ha  
a dleen ober ha n'em  
eus ket graet, war va  
gwall!*

*Goude na vijen  
ket barnet evit va  
fec'hejou, ha n'em  
eus ket lec'h da zou-  
ja na vefen kollet  
diwar-benn ar mad a*

*dleen ober ha n'em eus ket graet?*

*Koulskoude a-dostoc'h c'hoaz e sello Doue ouzin. Ous-  
penn war ar pec'hejou, war ar mad chomet hep beza graet,  
daoust ma oa dleet hen ober, barnet e vin ivez war va oberou  
santel. Ha mar n'o gran ket evel m'eo dleet, e-lec'h beza  
digollet, e vin kastizet.*

*Petra a zegouezo ganin, va Doue! Da belec'h ez in-me  
goude ar maro ? Na dleet eo d'in krena, mar am barnit hep  
truez.*

*N'oun ket chomet dalc'hmat hep lavarout va fedenn.  
Met alies, siouaz, ne beden nemet prim ha prim, gant eur  
spered war vale, gant eur galon yen, hep gouzout petra a  
lavaren, hep sonjal nemet diwar skanv e komzen ouz Doue!*

*Bet oun sul ha gouel en oferenn. Met alies e veze va  
sonj e-lec'h all, va daoulagad o sellout du-man ha du-hont...  
A-wechou e vezen kousket, a-wechou o komz en hoc'h iliz,  
va Doue!*

*Klevet em eus prezegennou santel. Met pe vad am eus-  
me tennet anezo? Marteze zoken em eus disprizet preze-  
genn ha prezegour, ha graet goap outo dirak an holl!*

*Meur a wech em eus yunet. Met nag alies am bije gelllet*

yun ha n'em eus ket yunet! Nag a yunou am eus torret ivez ha lakaet ar re-all da derri!

Roet em eus eun aluzen bennak, met kalz disteroc'h eget na c'hallen ha na dleen rei. Ha c'hoaz n'he roen alies nemet enep d'am c'halon, evit tremen diouz eur paour enoeüs pe c'hoaz evit beza meulet gant an dud.

Tostaet oun bet ouz sakramant ar Binijenn, da vihana pa c'hourc'hemenne an Iliz, met hep lakaat amzer a-walc'h da glask va fec'hejou, hep goulenn digant Doue sklerijenn evit o anavezout. Ha neuze pelec'h e oa va gwir c'hlac'har anezo? Pelec'h e oa va mennoz start da drei kein d'ezo a-grenn? Pegen lezirek oun bet d'ober ar binijenn roet d'in ha dreist-holl da bardoni d'an nesa, da baea va dle, da zaskori, da renti an traou gwallgemeret, da zigoll eus an droug graet d'ar re-all en o madou gant va laeronsi, en o enor gant va gwallgomzou!

Pa dostaen ouz Sakramant an Aoter, e-lec'h mont da zegemer Jezuz gant eur goustians c'hlan, gant eur galon izel, gant eur feiz virvidik, gant eur fizians vras, gant eur garantez santel, aet oun bet gant eur spered war vale, gant eun ene dic'houst, gant eur galon yen, hag a-wechou marteze gant eur goustians diaes. Sorc'hennet e vezen gant traou ar bed. Ne gemeren ket ar boan d'en em lakaat e stad da gomunia. Marteze, zoken, siouaz! em eus degemeret Jezuz, va Doue, en eur galon louzet gant ar fallentez, brein gant ar pec'hed.

Ha va gwella oberou, e-lec'h o ober evit plijout da Zoue ha savetei va ene, n'em eus graet darn anezo nemet dre gustumans, dre lorc'h, evit ma vije sonjet ha komzet mat ac'hanoun, evit kaout meuleudi digant an dud.

Siouaz, va Salver! Krena a ran evit e-leiz eus va oberou gwella, pa vint pouezet dirak ho Justis. Krena a ran, pa sonjan en eur euzus ma vin barnet ganeoc'h warno. Rak enno e kavan meur a si, ha c'houi a gavo muioc'h c'hoaz. Hag evel-se eo ret d'in anzav gant mez ha lavarout gant anken n'am eus ket, pell ac'hano, ho servijet evel ma oa dleet d'in hen ober.

※  
※※

Ha gallout a ran beza e gortoz da veza digollet ganeoc'h evel an dud a ra mat o dever? N'em eus ket kentoc'h lec'h da gaout aon da veza kastizet gant ho Justis, goude ma vin bet barnet? A, va Doue, koll a ran va spered, pa choman da sonjal em fallentez ha da sellout ouz ho Justis.

Fallgaloni a rafen a-grenn, panevet d'ho madelez truezus a ro d'in frealzidigez em glac'har.

Ho pet truez ouzin eta, va Doue, hervez ho madelez divent. Rak aliesoc'h eget bemdez oun bet en em savet enep d'eoc'h. Penn ebet ne gavan d'an niver a bec'hejou am eus graet. Bez'ez eus anezo muioc'h eget n'eus a dakennou gwad ennoun. Ankounac'hait, me ho ped, an droug am eus graet em yaouankiz, e-kreiz va nerz, em c'hozni. Distroit ho taoulagad diwar fallenteziou ho krouadur. Rak, mar pellit outo gant evez ho Justis, piou a c'hallo harz, va Doue? Pardonit d'in eta, va Salver, abalamour d'ho hano santel ha da silvidigez va ene paour.

\*  
\*\*

Daoust pegen teneraet e kavan va c'halon, pa sonjan penaos e tleen beva ha penaos em eus bevet, ne deo ket a-walc'h d'in beza ankeniet, eun dra bennak ouspenn am eus d'ober :

Gouzout petra a vir ouzin a servija va Doue evel m'eo gourc'hemennet. Anavezout reiz va zechou, ar pec'hejou a gouezan enno an alies. Sellout ouz va c'houstians ken pervez, ken spis evel pa vijen e par ar maro, o vont dirak an Aotrou Doue.

Klask e goueled va c'halon, furchal ervat plegou ha displegou va c'houstians, evit anavezout splann mar deo ar lorc'hentez, pe ar bizoni, pe an hudurniez, pe ar warizi, pe ar vezventi, pe ar gounnar, pe al leziregez, pe marteze estreget eun tech, en deus graet d'in dilezel va deveriou e-kenver Doue.

A-vreman e vennan, kousket a gousto, terri va gwall-

dechou, trei kein d'an daremprejou fall, lavarout kenavo d'ar pec'hed ha beza da Zoue evit mat.

Met ne c'hellan netra hepdoc'h, va Jezuz!

Setu perak e lavaran d'eoc'h gant ar vrasa fizians :

« Va Salver, klanv eo an hini a garit. Met c'houi a c'hall e wellaat. E wellait eta, me ho ped. Sellit ouz va ene kentoc'h eget ouz va c'horf. Klenvejou ar c'horf ne gasont nemet d'ar maro a vo ret d'in tremen drezan abred pe ziwezat. Hogen klenvejou an ene, ar pec'hejou, mar ne vezont lamet, a gaso d'an ifern. Hag aon am eus rak-se.

Gwir vezeg, gwir vedesin an eneou, disammit va ene paour. Evit-se n'hoc'h eus nemet eur ger da lavarout. Lavarit ar ger-se, a vo Jezuz! Trawalc'h e vo evit tenna va ene diouz liammou an diaoul, evit rei d'ezan nerz da derri e walldechou, evit e zegas da veza gwenn evel an erc'h. Roit eta d'in, va Doue, ar c'hras d'hoc'h anavezout, d'ho karout ha d'ho servija ker mat war an douar, ma c'hallin mont d'hoc'h anavezout gwelloc'h, d'ho karout muioc'h, d'hoc'h adori ivez gant an Aelez da-virviken en env. Setu ar c'hras a c'houlennan diganeoc'h, va Jezuz, dre bedennou Mari ho Mamm. »

\*

\*\*

— Kemerit evit hoc'h ene an daou boked-man :

Ar re o devo graet ar mad, eme an Aviel, a yelo d'ar vuhez a bad da-viken.

Kemerit kalon, servijour mat ha feal, deuit da levezet ho Mestr, a lavar an Aotrou Doue.

Adskrivet gant GOURNADEC'H.

=====

Na lavarit ket  
d'ho pugale mont  
d'an Oferenn ;  
It  
asamblez ganto !

Seul-vui en em ana-  
vezoc'h hoc'h-unan,  
Seul-nebentoc'h  
e kondaonoc'h  
ar re-all.

## Maro Sant Yann-Vadezour

Gouzout a rit e oa bet taolet sant Yann-Vadezour er prizon, dre ma ne baouze ket da lavaret d'ar Roue Herodez :

« Difennet ez eo ouzoc'h beva gant gwreg ho preur. »

Evit beza rebechet kement-se d'ar roue, Yann-Vadezour en doa chachet warnan kasoni ar vaouez fall, Herodiadez he hano, hag houman ne glaske mui nemet eun dra : e lakat d'ar maro. Met kaer he doa-hi goulenn kement-se digant Herodez, heman ne selaoue ket anezi : rak hen a zouje ar Sant hag a gave memes e blijadur o tiviz gantan.

Eun devez koulskoude, Herodiadez a gavas an tu d'ober he gwalldaol. Ar roue Herodez, evit enori deiz ar bloaz e c'hanedigez, en doa pedet d'eur pred kaer en e balez an ofiserien eus e arme hag an duchentil vras a c'halite. Pedet e oa bet ivez Salome, eur verc'h da Herodiadez, ha goulennet e oa diganti dansal evit ober plijadur d'ar re a oa ouz

taol. E gwirionez, plijout a reas kement d'ar roue ha d'ar re a oa en-dro d'ezan ma lavaras Herodez d'ezi :

« Goulennit diganin ar pez a garoc'h ha me her roio d'eoc'h. Ya, eme-hen en eur doui, kement a c'houlennoc'h diganin, nag e vefe eun hanter eus va rouantelez, me her roio d'eoc'h. »

Kerkent Salome d'ar red da gaout he mamm ha da lavaret d'ezi : « Pet e c'houlennin-me? — Per Yann-Vadezour war eur plad. »

Herodez a oue nec'het-bras ouz he c'hlevet o c'houlenn an dra-se. Koulskoude, dre m'en doa



Ar Roue Herodez

prometet rei d'ezhi he goulenn, ne gredas ket en em zislavaret. Gourc'hemenn a ra eta da unan eus e soudarded mont d'ar prizon da drouc'ha penn ar Sant ha d'hen digas gantan war eur plad. Ar pezh a voe graet dioustu. An danserez divergont a gemer penn sant Yann digaset d'ezhi war eur plad hag a ya d'her c'hinnig d'he mamm. Ha, war a gonter, e krogas houman d'her pika gant eun nadoz, kement a gaso-ni m'he doa ouz ar Sant.

Diskibien Yann-Vadezour o veza gouezet e oa bet lakaet d'ar maro a yeas da c'houlenn korf o mestr digant ar roue. Roet e voe d'ezo hag int hel lakeas en eur bez. Jezuz, o klevet e oa bet dibennet sant Yann war urz ar roue, hag o c'houzout e klaske breman an tu da noazout d'ezan e-unan, a savas en eur vag gant e ziskibien evit en em denna en eul lec'h distro e tal kêr Betsaïda.

An istor-man a zesko d'eomp pegeit e c'hell mont eur vaouez en droug, p'en em ro d'an dizurz ha pa gemer kasoni ouz unan bennak. Dont a ra a-wechou da veza kriz ha didruez dreist ar re falla, ha gouest eo neuze d'ober ne vern ket pe seurt torfed.

Gwelet a rit ivez pegen pell e c'hell mont eur plac'h yaouank en em roet da holl blijaduriou ar bed, eun danserez ha ne glask netra ken nemet beza estimet ha meulet gant an dud fall ha dirollet. Sur a-walc'h, ar merc'hed yaouank a gouezo kement-man dirak o daoulagad, hag a gar dansal, ne deuit ket, abalamour d'an dans hepken, da veza ken foll ha Salome. Koulskoude me lavaro d'ezo diwall mat ha pellaat da vihana diouz an dansou dizonest. Ped o deus ehanet da veza merc'hed pur ha divlamm eun devez bennak m'o deus en em roet d'an dansou-se enep d'o c'houstians o c'hourdrouz, enep d'an aliou mat o deus klevet ken alies hag o deus disprizet! Ya, diwallit, mar ne fell ket d'eoc'h skuilha diwezatoc'h daëlou c'houero ha mar-teze gwelet o koueza diwar ho penn kurunenn gaër ar gwerc'hted.

Ar roue Herodez eo en doa graet dibenna sant Yann, hag ar penn kaoz eus eun torfed ken euzus ez eo ar vezventi. N'eus ket par d'ar vezventi evit lakaat eun den da

veza kriz ha didruez e-kenver an nesa. An neb a zo gounezet a-grenn d'ar gwall dech-se, ne glask nemet e blijadur e-unan. Gwas-a-se d'an nez a lakaio a-dreuz e hent hag en em savo en e eneb! Mar deo an den-se eur roue, mar en deus droajou war eur vro ha galloud war dud all, e vezo gwelet alies o lakat o gwad da redek a-boulladou : istor ar bed a zesko kement-se da biou bennak en deus he lennet.

Herodez, a lavar d'eomp an Aviel, en doa touet dirak e ofiserien rei da Salome kement a c'houlennje-hi digantan; hag e roas d'ezhi an dra fall a c'houlenne dre m'en doa touet, ha dre ma ne fell ket d'ezan en em zislavaret.


Leou-douet ar seurt-se a zo re zievez. Eur pec'hed eo o ober hag eur pec'hed brasoc'h c'hoaz derc'hel d'ezo. Morse n'eo mat prometi ober eun dra fall ha difennet gant lezenn Doue; daou bec'hed e reer eta, oc'h ober ar pezh a zo bet prometet ha prometet dindan le.

Sant Yann en deus bet an enor da veza an diweza hag ar brasa eus ar brofeted, an enor da veza bet choazet evit kompeza an hent dirak Salver ar bed. Met eun enor all en deus bet c'hoaz : an enor da veza merzer. Lakaet eo bet d'ar maro dre ma tifenne, dal-penn, ouz ar roue ar wirionez ha lezenn ar briedelez. En eur c'houzanv ar prizon hag ar maro kentoc'h eget sarra e c'henou, sant Yann en deus douget testeni d'ar wirionez ho d'ar glanded. Ar glanded, glanded an ene hag ivez glanded ar c'horf, pep den a d'e he derc'hel hervez e stad, ar vugale evel an dud en oad, an dud dimezet evel an dud dizemez, ar re goz evel ar re yaouank, ar merc'hed evel ar wazed. Mar en deus unan bennak kollet ar glanded-se, ez eo ret d'ezan he c'hlask endro en eur ober pinijenn, rak « *netra saotret ne vezo digemeret e rouantelez an Nenv.* »

#### DIWAR-BENN AR GOFESION...

— Da gofes?... Adarre?!!

— Ya vat... Adarre.. Petra fell d'eoc'h, va den mat, me zo bet kustumet a-viskoaz da veza atao neat a gori... hag a spered.



## Piou, nemetan ?

Breman 'z eus eun nebeut bloaveziou e savas trouz etre ar Chili hag ar Republik Arjentin, hag e voe kaoz a vrezel. Met e-lec'h en em zrailha, an diou vro a glaskas en em glevout ha dont a rejont a-benn. En enor d'an emgleo-se e savjont war eur menez uhel-meurbet *Kroaz Hor Salver*, an hini m'eo diazezet warni ar peoc'h etre an dud, ar familhou hag ar broiou.

N'eus ket pell, e savas trouz ivez etre ar Chili hag ar Perou diwar-benn eur c'hornad douar. Met e-lec'h en em daga, petra 'rejont? Sevel war ar c'hornad-douar-se skeudenn Hor Salver, gant ar c'homzou-man :

« En em garit an eil egile. »

Eyt derc'hel ar peoc'h etre ar broiou, eo ret kaout *eur Mestr bras*.

Piou vezo ar Mestr bras-se, nemet *Hor Salver Jezuz-Krist?*

*Ar relijion da genta!*



F. D. J. h.

## Pedomp an eil evit egile

Setu aman an intansionou a zo bet digaset d'eomp er miz tremenet, ar re varo a zo bet goulennet pedennou evito, ha hanoiou hor madoberourien. Ni hor bezo sonj anezo en hon oferennou hag en hor pedennou, ha goulenn a reomp ivez digant hol lennerien pedi evito.

INTANSIONOU. — Eur familh glac'haret; eun operation danjerus; meur a eksamin.

HON ANAON. — *Gourin* : Louise Le Lidec; *Priziac* : Joseph Royant; *Baden* : Jeanne-Marie Mentec; *Commana* : Jeannie Corre.

## Lennit ha roit da lenn

An Oierenn displeget gant taolennou

priz : 1 fr. 50 ; dre ar post : 1 fr. 75.

La Sainte Messe expliquée et illustrée

priz : 1 fr. 50 ; dre ar post : 1 fr. 75.

Eun dibab Kantigou

gant kantigou nevez — dreist-holl unan da gana a-hed an oferenn — savet gant an Tad Barnabe. — Priz : 0 fr. 60.

Evit ar Misionou, Retrejou, Adorasionou,  
Evit ar skolioù hag ar patronajou,

20 % gwelloc'h-marc'had,

Lennit ha roit da lenn



*Le Gérant : G. LE BAYON.*

*Imp. LE BAYON-ROGER & HENRIO - Lorient.*